

POBL VREIZH

3

NIV. 96
GENVER 1978



HARPIT POBL VREIZH

KRP 2746-89 ROAZON
CCP RENNES


Pl listennad

Y. Rouger, Kerk Kernew	20 00 L
A. An Triskell, Tolouze (33)	40 00 L
Daniel L.C. Allier	40 00 L
Kaver L.C. Plomier	20 00 L
Philippe D. Toulouze	20 00 L
Jakez R. Ploümagar	20 00 L
Ewid ar Vretoned, ar C'henned	20 00 L
Danielle S. Le Grand (Quimper) (33)	20 00 L
Jakez Polzer, Gwened	20 00 L
Yannig Duic'h, Kernew	20 00 L
Mason Kerbat, Kernew	20 00 L
Yann Maerl, Kernew	20 00 L
J.C. S. Marnes La Coquette	20 00 L
Frédéric X. Marnes	20 00 L
Klaod Boussake, Kemper	12 50 L
Per S. Roazon	20 00 L
Jodi D. Trezenneg	20 00 L
Fañch Kernew, Al Roc'h	20 00 L
	412 50 L
Diwar al listennadoù all	448 70 L
En oñ	481 20 L



Pobl Vreizh

D'ar sadorn 25 a vis C'hwerter, da 8^h 30 nos, e vo ur meeting bras e Roazon, war leurgêr al lisoù, meeting bras Breizh newez, meeting bras Breizh da-zont ! Kanerien vo ! Eus peb korn a Vreizh e teredo tud d'ar meeting. Meur a otokar a vo feurmet gant re an UDB. Lakait ho hanv diwar vremañ ! Ewid netra e vo ar veaj. Gouennit titouroù digant re an UDB !



PROGRAMME
DEMOCRATIQUE BRETON UDB

Deuet eo er-moes **Program demokratek Breizh**, ul levrig 67 pajenn ennañ. A boues bras eo al levrig-se ewid gouzoud petra vo Breizh da-zont, pa vo mesfr ar Vretoned war o aferioù.

Diskouez e ra ar PDB e pessorit stad emañ hon bro, dre faot ar sistem kapitalist ha kreisennet... Ha poent bras eo d'an oll Vretoned kar-o-bro ha kar-on-tu-kreiz « krogiñ e-barzh », ha prepariñ an hent a gass d'ar sossialism.

5 L an tamm, ha 2 L ewid ar misoù-kass. Gouennit an tamm levr burzhudus-se digant re an UDB.

KARAS HENT
238
ru Jean Jaures
Tel. 02 35 02
BREST

Komanantit da Le Peuple Breton
E galleg penn-da-benn
B.P. 304 - 29273 BREST CEDEX

Hanv hag hanw-badez :

Chomlec'h :

a gass e gomanant
Boutin : 30 L (1)
Skoaz : 50 L (1)
Estranvro : 40 L (1)

Amañ an arc'hant
dre chekenn-bost (1)
dre vandat-lizhar (1)
dre chekenn-vank (1)
CCP RENNES 2365-76

(1) Diverket ar gerioù na servijont ket

Pobl Vreizh

KOMANANTOÙ
boutin : 30 L
skoaz : 50 L
pe ouzhpenn
KRP ROAZON
2746-79
CCP RENNES

Ti-Moullerezh « Iroise »
29219 Releg-Kerhuon
Rener ar gelaouenn :
Fañch Morvanou C.P.P.A. 50 051
2000 skwerenn

Un ti newez a vo savet e-kreis yeun Poull-Don Pont 'n-Abad

Pebezh souezhezadenn ewid ar re a ya eus Kombrid da Bont 'n-Abad gant an hent bras, p' o deus gwelet, e-kreis yeunioù ar Poull-Don, n'eo ket ur ouenn lapoussed dre harz mont da get, med ur bern mein, pe, kentoc'h, ur mofiad beton da sevel ti...

Aotreet eo bet an « aotre-sevel-ti » (*permis de construire*) e-barzh yeun Poull-Don gant maer Pont 'n-Abad ha gant ar prefed.

Ur den lier e veech'eo an D^r Benard, maer Pont 'n-Abad, hag ez eo unan eus pennoù bras ar vro vigoudenn ; presidant eo amañ, rener pelloc'h, penrener memes. Ouzhpenn-se ez eo kusulier jeneral ar c'hanton, braw dehoñ tremen hebiou d'al lezennoù ewid kass war-raog e bolitikezh dehoñ, hag ewid ober war-dro e gumun dehoñ. Ne vez ket nec'h ewid mont da weled ar prefed war-ecun pa vez tammou bec'h gant ar burevioù.

Assantet en deus eta maer Pont 'n-Abad rouñ ur permi-sevel-ti da unan deus e gompere, heb goull netra en arag digant an Ekipamant : nac'h eo bet ar permi gant hemañ.

Pa vez disemgle etre an ti-kêr hag an Ekipamant, e vez desidet gant ar Prefektur : eveljust ez eo savet re ar Prefektur a-du gant ar maer.

Fougasset ar maer 'vad, ha brudet ar c'heleu war **Ouest-France** (30-9-77) : « Peogwir n'eus POS ebet, ne oa ket obliget ar maer da refus ur permi sevel-ti ba al lec'h-se ».

Pe neuse, Aotrou Maer, n' anavit ket mad awal'ch lezennoù an urbanism, pe neuse e vezont kammnet ganeoc'h espreskêr, dre ma ouzoc'h ervad ne yelo ket an dud da bismigañ war skridoù kod an urbanism, ken diases lenn aneche ha kompren aneche.

Diwar al lezennoù e oa moien da refus ar permi, ar pezh en doa kenniget an Ekipamant just awal'ch :



Pobl Vreizh

1) Pa vezer o studiañ ur POS, e c'hell an ti-kêr goullenn ma vefe lakaet un dale (*sur-site*) arag statutañ.

Yeunioù ar Poull-Don zo aneche un dachenn ekolojig dispar hag emañ eta o vont da zispenn aneche.

E diabarzh ur pezh tachenn ekolojig eh en em gav ar Poull-Don, gant stêr Pont 'n-Abad hag ar c'hoajoù tro-dro.

A-boues bras eo ar yeunioù ewid kempoues an natur :

a) Silañ an dour a ra ar yeunioù, ha dispartiañ al loustono anehoñ ; bez ez int ur poull da zilawañ (*décarter*) an dour, hag e

2) Reolenn (*règlement*) broadel (*national*) an Ekipamant (pennad 111-21) e c'heller diwarni nac'h an aotre-sevel-ti, ma vez an ti-se, ur wech savet, gouest da zistressañ stumpe pe klerded al lec'hioù tro-dro ; tachenn diase sevel ti warni, « nik-saj » (kemmeskal) ar maesoù...

2) En divaeus deus an tachennoù tier warne, ne vez ket aotreet digorif un hent war-ecun da dapoud un hent bras stank ar roullamant warnañ.


3) Pa vezer o studiañ ur POS, e c'hell an ti-kêr goullenn ma vefe lakaet un dale (*sur-site*) arag statutañ.

Yeunioù ar Poull-Don zo aneche un dachenn ekolojig dispar hag emañ eta o vont da zispenn aneche.

E diabarzh ur pezh tachenn ekolojig eh en em gav ar Poull-Don, gant stêr Pont 'n-Abad hag ar c'hoajoù tro-dro.

A-boues bras eo ar yeunioù ewid kempoues an natur :

a) Silañ an dour a ra ar yeunioù, ha dispartiañ al loustono anehoñ ; bez ez int ur poull da zilawañ (*décarter*) an dour, hag e



Pobl Vreizh

tourant an eiennoù. Pessorit eled a vo heni ur fos septik eno ! Da gentañ, ne yelo ket en-dro, hag e vo louset ganti, kasi sur, an dour a ya goude-se e diabarzh parkoù-istr stêr Pont 'n-Abad.

b) Gant o flantennoù o vevañ ban dour, gant o gwez stank, e ro yeunioù ar Poull-Don bod da laboussed a beh sort : houidi o c'hollieroù glas, krak-houidi (*scarrelles*), bargelled (*brases*), spar-felled...

Skiler eo, ma vez tud en o c'hichen eno dale'hamad, e yelo al bened-se diwar wel da vad... Ma vez aotreet sevel an ti-se, e vo aotreet sevel roell all en e gichen...

Bord ar mor ne c'heller ket mont tost dehoñ kên, gant an stank ma 'z eo an eil-tir (*résidence secondaires*) warnañ...

Neuse, daoust hag-efit e vo gwelet da zale bar vro vigoudenn tier war beulioù e-leiz, e-barzh ar yeunioù ?

War an tu-se emañ o vont koulskoude, ma talc'her d'ober evel ma ra pennoù bras an tu dehoñ, ha na raont nemed sevel a-du kreñt gant ar berc'hentelzh brevez (*propriété privée*) ; ne raont nemed souten an interestoù prevez, hag e raont fae war interest an oll.

Gant ar politikerezh-se emañ o vont da skrapañ an douar-labour, ar c'hornadoù koant, hag emañ o tressañ an natur, kaweil ha stern ar ruzec koulskoude.

AL LIAMM
ar gelaouenn nemeti o roñ, 6 wech ar bloaz
barzhonegoù, komtadennoù, pennadoù a beb sur ha keleier
80 pajenn e peb niverenn - Rener - Ronan Huon
komanant - 35 L - Studierien - 25 L
Tehzorer-meurour : P. Le Bihan - 16, rue des Fourrés-Chaux
ST-SERVAN 35400 ST-MALO - CCP 5349-05 PARIS

AR FALZ
kelaouenn drimsteg an Emsav diaset gant Yann Sahier,
boden emañ skolarien ha kelennerien Vreizh a-du-gant ur
skol vreizhag ha leiz gwionn.
Lennit Ar Falz ! Komanantit d'Ar Falz !
130 L ewid 6 wech
AR FALZ, Str. Kan-er-Gwez - 29245 PLUDUN MONTRIOLES
KRP 420-2 H ROAZON

Ha laosket e vo an douar dindan gozhenn e Plounerin ?

D'an 21 a vis Meurzh, e oa en em vodet un 150 bennag o labourerien-douar e Plounerin (22), da dreñ ugent dewezh- arad douar frost, e-tal kichen menaj ar priegoù Fall. Goulet en doa ur mob dehe, Rolland, feurmiñ an douaroù-se ewid chom da labourad frost d' e dud. Seizh vloaz zo, e oa bet laosket an douaroù-se gant ar Barisones o zo perc'henn warne ! N'he deus ket assantet feurmiñ.

Adfranket eo bet gant ar « Sénat » an danvez-lesenn diwarbenn an douaroù frost. Hervez ar FNSEA hag ar CDJA eo bet charifet spered al lesenn pen-da-benn. Pedet e oa bet ar senatourien hag an deputed da zont d'ober un tamm tro war an dachenn. E-touesk an Aotronez, ar pennoù-bras-se, ne oa deuet nemed an Aotrou Lasselain (PS) da selouo rebechoù ar venjenier. Trist eo, dre ma eo an danvez-lesenn-se, soñset, da vezañ odgwelket gant an Assamble prestij.

Ha roet e vo an douar d'ar re a zo o labourad anehoñ ? Heb labourerien-douar, n'eus Breizh ebed. Graet eo an douar ewid reiñ boued d'an dud, n'eo ket da zougen lousoù ha loustoni ! Ma ne vez ket roet an tu d'an dud da vevañ prop gant trawalc'h a zouar, eh aio ar vro-mañ da goll.

Ezomm o deus menajerien yaouank Breizh da gaoud douar ewid chom da labourad bar vro hag e teuy Breizh evelde da vezañ ur vro vev endro. Re d'oudous eo an douar ewid ma vefe laosket etre daouarn « ur bagad tridi » deus kornioù pinwidig, tud n'int ket deus ar vicher ha na vezont gwelet nemed daou vis beb bloaz, pe gant tud hag a laosk anehoñ da vevañ dindan an dres hag ar spenn. Breizh n'ema ket da werzhoñ !

Kuit da gaoud rih er gouarn-mañ, galsit heb d'ale
Eujen KEMENER
 e Tre-Laouenan
 (etre Kastell-Paol ha Landi)
 pellg. 69.98.98
 pe e Brest (Str. Villeneuve)
 pellg. 02.02.60
 Fuel a vezo degasset deoc'h kerent,
 lakaet ho tonnerezh-kreis e doare
 ha rñset ar siminal
 Arabad mogediñ hor bro, na dispign
 arc'hant dre ziewezh



Publ Vreizh

An tu dehoù n'en deus graet netra ewid Breizh... Celib Champeaux n'eo nemed ur farsadenn. Ha petra 'ray re an tu kleiz gall ? Petra eo gouest d'ober ? Ar PCF, e Breizh evel e lec'h-all, zo ken jakobin hag an RPR : war ar poent-se da vihanañ eh em glewont. Hag ar PS ? Amañ war ar foto e weler Mitterrand da geñver unan aus e veajoù e Breizh, ha Loeis ar Penseg, kannad PS ar Finister, o strakal an daouarn dehoù. Braw. Med petra 'c'hell ober strolladoù kreisennet e Paris ? Harpañ ar framm gall, netra muioc'h. Ar Vretoned kar-o-bro ha dihunet, aet e-barzh ar PS, zo o koll o foan ; re greñv eo ar sistem gall ewid derc'hel kont eus ar Vretoned hag ewid roiñ an emrenerezh dehe.

"MEIN-HARZ"

Revue de formation et de théorie de l'Union Démocratique Bretonne DÉCEMBRE 1971 - N°106 - 10 F

LUTTE CULTURELLE LUTTE POLITIQUE



Daou vloaz zo eh embann an UDB, a vare da vare, kalerioù teorik diwarbenn un danvez pe unan all... Newez zo eo deuet er maes an niver, 4, hag a zo, hi lve, a-boues bras. 10 L, an tamm, 40 paj. Da vezañ goulet digant an UDB BP 304 29273 BREST CEDEX

WAR HENCHOÙ-HOUARN AR « FAR-WEST » (kendalc'h)

O c'hortos ar pis-bihan

Daou vis zo, e oa aet kuit ur vagoniad pis-bihan eus Hungaria da vont betek gar Kemperle. Dec'h d'ar beure eh arvue an tren e penn o hent. Koul-skoude, pa fellas d'ar re a oa ouzh e c'hortos digorñ an dorioù, e vos lâret dehe ne c'hellent ket kaoud o marc'h-hadourezh. Ha perag ne oa ket bet graet araog ? Da skwer e-kehid ha ma oa an tren o tremen dre Roazon en ur vont da Kemperle. Maltouterien Roazon a soñje dehe e oa bet graet al labour gant o c'heneled eus Strasbourg, war an harzoù... ha re Strasbourg o devoa soñjet e vefe graet gant re Roazon...

E-kehid-se ema ataw menajerien korn-br Bro Kemperle o c'hortos o fis bihan. Setu ase Bro-C'hall hag he dessentralisation (digreizennerezh).

Tren 8 eur 31
 Di-sul diwezhañ, e-barzh an tren a guita Roazon da 8^h 31 ewid mont da Vrest. Graet e vez « tren express »


anehoñ. Ha perag 'ta ? Den ne oar, rag chom a ra a-sav e komant gar-Arru eo ar c'hozh tren-se ken kozh hag an douar. Ewid pignad anhoñ, ez eus diw basenn sonn pell an eil diouzh eben. Red e vez d'ar veajourien sachañ an dornell ha kregiñ stard e-barzh ewid dont a-benn eus ar gradenn.

« War henchoù-houarn Norzh ar Frañs e oa ar bagonioù-se, araog bezañ bet profet d'hon bro » gouez d'ar c'hontroler.

Ar restajoù a blij d'ar Vretoned, an dra-se a ouler pell zo.

Nann, n'eo ket gwall gâer ar bagonioù, gant o asezennoù kaled 'vel mein, o c'helnoù sonn-sonn ha c'hwes an torch gleb gante !

Gwashañ 'vez eo pa chom an tren a-sav. Pasenn ha pasenn e vez graet an arrest pe, kentoc'h, gant taolioù krenn eus ar starderes. Diwar beb taol e vount an eil bagon en eben, en ur stêpel ar veajourien er maes eus o asezennoù. Kement a drous a ra an tren neuse, ma kav d'un den ama o vont er maes deus ar railhoù. Ar wach kentañ, eh en em gaves war leurenn ar c'hompartment, pe war varlenn an ameseges a oa paravis dit ! Pa vazer kustumet, e taoler ewezh, ha kluchañ



etre diw asezenn, pe kregiñ stard e-barzh dornell ar prenest, en ur bediñ ma chomo an tren war an hent.

Fiziañs hon aus e vo taolet ar c'hozh traou-se d'ar blotoù, pe neuse e vo red ober ar gouleñn ma vo lakaet gourisoù surentez er c'hompartment-hoù...

Profou an SNCF a blij da veajourien Vreizh !

D. Giraudon

UR BLOAWEZH MAD GANT POBL VREIZH !

TRI C'HOMANANT DA B/POBL VREIZH GANT PRIS DAOU

Kaset ar baperenn-mañ (1) en ur verkañ warni hanwhag adress daou gomananter newez, hag en ur lakaad da heul ar paemant (30 L x 2 = 60 L), gant ur chekenn.
 Lakit ouzhpenn adress un 3^e komananter da vezañ kaset *Publ Vreizh* dehañ ewid netra epad ur bloaz. Ma fact deoc'h e vo kaset keloù d'ar gomananterien a ressewo ho profidenn, lakit ho harwg hag hoc'h adress war al linenn diwezhañ. Trugarez vras.

Komanant 1 :

Komanant 2 :

Komanant 3 (ewid netra) :

Komanantoù kenniget gant :

POBL VREIZH - Komanantoù - BP 304 29273 BREST CEDEX

(1) pe adskrivit anehi

AL LU...


Arabad ober al lu... eus al Lu 1... Di-garezit : eus an Arme.

Rag, evel ma oa da c'hortos, setu ma vo bremañ an Arme galvet d'ar stourm a-eneb enebourien an diabarzh.

Poent e oa !

Bremañ, amañ ez eus ur gudenn : piv eo enebourien an diabarzh ? Red eo gouzoud. Gouletmet e vo digant Mikael Debre — an heni fur, an heni a oar — diskoutez pere int. Hag e lakaio da gentañ, war an hevelep renk, ar vedisid-se, gwad ganto war o daouarn, a vez oc'h ober diforc'hidigezhioù (avertements), hag an Emrenerien, an dud digalon-se a weler o tufañ e-kreis fass hor Mamm-Vro, lazherien a-vremañ hor Santes Janed Ark venniget.

Per ar Gall



Bez 'zo 17 kandidat eus an UDB o vont war ar renk an taol-mañ : 5 e oa 5 bloaz zo. Diskouez a ra kement-mañ kresk an UDB : war an 33 fastell-votñ a gaver e Breizh, e vo re an UDB war 17 anehe. Setu amañ, war ar gartenn, o fotoloù, war o fastell-votñ. Emaint dija, lod anehe pell zo, o kaballù, o vont da weled an dud, o ch ober bodadegoù digor d'an oll. Emaint o tisplegañ d'ar Vretoned Program Demokratel Breizh. Emaint o tiskouez dehe pere eo diskoulmoù an UDB da gudem an dilabour hag an divroañ. Emaint o tiskouez dehe hent an emrenerzh hag heni ar sossialism. Muloc'h a gandidated a vefe c'hoazh ma vefe bet kreñvoc'h an arc'hant ganimp. Kassit ho kwenneien dimp ewid harpañ hon krogad, krogad meur mis Meurzh. Ha dreistoll, d'an 12 a vis Meurzh — ha d'an 19 jwe, piw 'oar ? — votit, ha lakit an dud da votñ ewid re an UDB. En ur votñ ewid an UDB, e votit diw wech : ur wech ewid Breizh, ur wech ewid an tu kleiz !

MEULGAN D'AR MESTROÛ MAD



da'm depute, da'm c'husulier jeneral, da'm maer

Leif People Britain

Awel ar c'hornôg ha richan an evned eo e binvidigezh, heni paour ar c'hoaz penati, digig e bredu, dichupenn e vugale : o kian ema war an tirienn skort ; warlene, e dad zo 'n em lazhet ; e vanaes he deus laret mont kuit ; e werc'h e New-York ne gred ket skrivañ ken ; e vab koshañ kasset d' an toull gant an arche-rien, lauzig an ti, mezh ar skol ; e Gallez put 'peus desket din, emezañ, plouk, ma zad !

Fraoñ toud ur c'harr-tan cheuc'h e-barzh ar porzh, strimpet ar funk, tec'het ar yer, ar c'hi o harzhall ; e N' Aotrou Maer, 'n Aotrou Kusulier-Meur, 'n Aotrou Depute, 'n Aotrou Person, deiz mad deoc'h, Aotrou bras, enor deoc'h, ma Aotrou, deuit tre, mest ar vro, fardet zo bet deoc'h gwestell gis ar barrez, tomn eo ar c'hafe newez, kig-sall ha krampouezh-lazh a yay ganeoc'h, geo geo geo !

Ya, Aotrou, votin a rin evitoc'h ; c'hi 'peus sinet aotre-sevel ti ma niz, c'hi 'peus alet da'm merc'h mont d' an Amerik, c'hi 'peus komzet eus ma mamm d' ar Ministr, c'hi 'peus paerit ur kemaoc'h gwiz raz divrme e tavarn ar c'hoaz-hu, ya, evitoc'h e votin, ha ma maoues iwe : evel-just : war an dachenn-mañ da vihanen en em glevomp mad !

Ya, ar re all zo laered toud ane, tud dionet, gaboullhadet ha lakepedet, kement-se 'n eus klevet digant ho mignoned : diskleriet o deus an traoñ din dre ar muvad, ma 'n eus kompreat fraezh, Aotrou Maer, Aotrou Kusulier-Meur, Aotrou Depute, Aotrou Kure, Aotrou 'n Aotrou !

Pennañ bras an darn mad ha pennañ bras an darn klez, deoc'h oll bennozh Doue ! C'hi eo divallerien ar vro : kavet 'peus labour da Jobig ar Bihan, souhilet 'peus korzallenn Yann e lommig, teret 'peus porzh ti-ferm al Lagaedeg, lakat 'peus gouloù a-hed an hent da Gerlivero-rou.

bet 'peus ur yalc'had-studi da vabig ar Soa... C'hi zo fin, c'hi zo fur : kassout ebet ne vez ennoc'h ouzh tud fallakr ar c'hoazestall all ; ar re-se zo er penn kentañ da gounn un taol-lañs diganeoc'h ; tamm-ha-tamm o deus intenet d' o zro, ha bre-mañ e noti o mouezh deoc'h ; e-lec'h mont da heul al laeron, an hailloned hag ar pil-o-beg a sav ouzoc'h ! C'hi a wel spis e-barzh c'hoarioù kumm ar re all, Aotrou ; c'hoant o deus da skrapad ho kador evid gounid ho kopr, lakaod o c'hereni er plasoù mad, kavud distadon pris war beb tra, pennañ braud ha sevel uhelloc'h uhel da vabig an dud vunut dindan o yev !

Hag o-benn tizhouz o fal milliget, e reont gant ar politik, e skignont soñjoñ politik, e pegant skritelloù politik un dra louz eo ar politikerezh, me ne ran ket tamm politikach, onest on-me, Aotrou Maer Meur ! Ar re-se a vev ar politik gant kement tra : ar goprou re isel, ar yaouankioñ dilabour, ar c'hoaz skolina o Kouezhañ, al labourerien- diouar o 'n em zifenn, ar brezhoneg o vont d' an traoñ, gant ar vev !

Euzsamant emaoch-c'hi ase, Aotrou Depute-maerkusulier, da vougañ soñjoñnoù direizh ma-b-den, da viroud ouz ar dud da varn dichek (ma 'n em lakfe heb-unan da varn an traoñ, da belec'h ez afe an doujañs ?...) Ase emaoch da lared d' ar gasetenn petra zo da skrivañ ha petra zo da gushad ; ase emaoch da ziskoumañ ar c'hudennnoù a gavomp war hon hent !

Qua soñjan : ema ma mab oc'h ober e goñje e Loran-Bihoue : trugarez deoc'h — pebezh burzhud, ma Doue ! — ...)

Kanomp, kanomp, kanomp meleudi da bennañ bras hon c'hornig bro, hon mouezhoù ayas dehe !

Erwan Evenou

UN TAMM

E niv. mis Here Pobl Vreizh (niv. 93), en doa hon kamarad R.Y. Merdy skrivet ur pennad berr awalic'h diwarbenn ar muse bet savet newez zo e-barzh ti-skol kozh Tregarvan...

Ma soñj da lod ne vez ket lennet Pobl Vreizh, e fassont ! Lennet e vez ! Lennet eo bet niv. 93 gant an It. Millour evelkent. Pe e vez lennet Pobl Vreizh ganti aketus beb mis — un dra vad newe, ha gourc'hemennnoù dehi —, pe ez eus bet kavet un den a galon — evid lakaad an nivrenn-se dindan he daoulagad dehi — mad memestra, rag evelse ez eo bet lennet Pobl Vreizh ganti unan ouzpenñ.

An It. Millour zo ar pezh 'vez graet e conseilherez pedagogique — aneñañ e galleg — : kusulieres pedagogeg — neuse e brezhoneg bras ; da lared en, ez eo an It. Millour ur vestreskolez. E Kameled ema an It. Millour o chom. Setu 'n'ema ket gwall bell diouzh Tregarvan. Ha setu perag, 'mechañs, e oa-hi war evezh deus kement a vez skrivet o tenañ d'ar muse. Ha ma ne oa ket war evezh aneñañ e-hunan diwarbenn Pobl Vreizh, ez eus bet kavet, ur wech c'hoazh, un den mad, kusulier iwe emchañs, evid roñf dehi niv. 93 PV da lenn.

Setu he deus skrivet an It. Millour da b Pobl Vreizh. War an ton bras. Un tamm e-voñ : o, e galleg, hag al lizher neuse, kalz hiroc'h, e brezhoneg, hag e brezhoneg brav, ya'h, flour, un dud.

Setu amañ neuse lizher an It. Millour. — War niv. 93 ho kasetenn ez eus bet embannet ur pennad bet skrivet gant an Ao. R.Y. Merdy diwarbenn kentañ diskouezadeg. — Muse ar skol a wechall ! e Tregarvan. Ar pennad-skrid hag ar foto a ya da heul ne c'hellont ket bezañ degemeret gant skipailh ar re a zo o klask lakaad ar muse da vevañ anvet. Dre zivuner a ditouroù a beb sort diwarbenn ar muse, n'en deus ket komprenet an Ao. Merdy ar pezh emaoomp o klask ober... (troet diwar ar galleg)

— Un abadenñ amzer zo endev, en deus an Ao. Merdy distaget ur pennad traoñ, war ar gasetenn Pobl Vreizh eus mis Here. Lenn a raer kalz droug en tamm-se eus diskouezadeg Tregarvan diwarbenn ar skol a wechall.

Kalz diegi 'n eus bet evid respont d'an den-se, rag ar brezhoneg a geman-ne n'eo ket bet desket gant ar skolioù, med em zi, gant ma zud. Kalz gerioù gouizieg a vanko din emchañs hag ouzpenñ n'ok ket sur da c'hoùd skrivañ heb ober fasioù. Koulskoude, daw din mont dehi, rag re a bismigou distleal en deus graet an Ao. Merdy.

— Diouhtu eo daw da heb heni gouzoud penaos portred ar plac'hig koant gant blew hir e-kreis ar bajenn n'eo ket heni ur bugel eus ar vro war e zilhpad pemdez. Koll a raf e amzer an heni a chomfe d'e glask e skol gozh Tregarvan.

Med strasooc'h zo. — N'eus botes ebet, n'eus buoc'h ebet — 'taxar an Ao. Merdy. Ma kare bezañ goulennet, e vije bet lavaret dehañ emaoomp da vad e soñj diskouez d'ar weladennoerien

SACH BLEW...

penaos eo bet chassat ar brezhoneg gant skolioù gwechall. — Tennet eo bet an neudennou elektrik. — N'eo ket gwir, med graet eo vo, eveljust, a-benn an hañv a zeu.

Komz a ra iwe eus an douristed hag a zeu d'ober « a l » hag « o l » dirag relegoù Breizh. Daw eo gouzoud zo deuz muioc'h a dud eus ar vro da weled diskouezadeg Tregarvan evid ma zo bet a douristed. Hag o zaol lagad a skoazello da wellaad perzh ar muse.

Traoù all zo molen d'ober e-barzh ti-skol Tregarvan. — C'hell an ao. Merdy bezañ laouen — rag ema an dud bodennet en-dro d'ar muse — sellet digorñ en e gichen un tammig levaraog, ur sal evid ar re gozh, lojez evid ar re o dele c'hoant d'ober enklaskoù. — N'eo ket un « Enseller Akademiezh » (ne anaven ket ar gese) a zo e penn deus diskouezadeg Tregarvan, med un « Inspecteur de l'enseignement élémentaire » (penaos e lavarer an dra-se e brezhoneg, ao. Merdy ?) An den-se n'en deus ket gortosat al den ebet evid sourstal deus ar skolioù a ya en-dro — hag ar vistri-skol zo d'e heul kennevid e labourad war o micher...

Y. Millour, Kameled, en hanw ar re a zo en-dro da di-skol Tregarvan. — Responter hon eus d'an It. Millour : — Ho trugarekaad a raomp o weled ez oc'h interestet gant Pobl Vreizh.

Bez eo an Ao. Merdy unan o skrivañ war b Pobl Vreizh a vare da vare. Dre ma 'z eo sinet ar pennad (p. 3 niv. 93 Pobl Vreizh), n'eo ket ur pennad o tiplegeañ fraezh sav-boent ar gelouenn, evel ma ra re n'int ket sinet hag a zispleg, int, sav-boent ofisiel ar gelouenn, kouz lared. Diwar ar reolen-se eta, ar pennad sinet gant an Ao. Merdy ne zispleg nemed e sav-boent dehañ e-hunan.

Setu ez eo anad penaos ez eus meur a

santiment e-sonsek an dud diwarbenn muse Tregarvan. An Ao. Merdy en deus e heni, c'hi 'peus ho heni. N'eus heni ebet hag a lak'emp da vevañ degemeret dre red. Embann a raomp ho lizher : bez e c'hello hon lennerien ober o soñj, forzh pegen diheñvel eo ho santiment deoc'h diouzh heni an Ao. Merdy.

Rast mat eo koulskoude, war hon mern, an tamm brezhoneg eo ho lizher, peogwir, o komz deus an Ao. Merdy, e skrivit « pismigou distleal ». Un den leal tre eo an Ao. Merdy, ez c'hontret, Kemeromp neuse bremañ hennennnoù deus ho rebechoù : — ar foto a oa bet lakad evid skudennoù ar pennad n'eo bet lakad evid skouezadeg oñ heni ur Breton pe ur Vretones yaouank. Bez eo heni un Indian, deuet d'e oad, eus Amerik ar C'hreisteiz, ha dre al lejad lakad dindan (« Ha mont a raomp da Indianed n'eo iwe ? ») e fell deomp degas da soñj ez eus etre ar « reservoù Indianed » ha serten traoñ emae oc'h ober dre amañ, meur a dra heñvel mat : emae iwe o klask ober eus hor bro ur rezerv turistikel pe ur muse.

— N'eus na « botes » na « buoc'h ». Evelse ema : n'emaint ket eno. Oc'h ober ur weladenñ da vuse Tregarvan, n'en deus gwelet an Ao. Merdy metra eus an traoñ-se. Gwell-ase ma vo displeget diwezatoch, e-harzh an diskouezadeg, pegen kria, pegen dizeuz eo bet ar bresel bet graet d'ar brezhoneg gant 3^e Republik ar Frañs.

— evid an douristed, ne lir ket an Ao. Merdy ne vez nemeto o weladenñ ti-skol Tregarvan, bet serrat ha bet graet ur muse gantañ. Da santiment an Ao. Merdy ez eus un danjer gant serten mousoù zo, ma vefe skarillet ha yenn-marve enne ur farm zo deus ar vuez e Breizh, evel ma vefe achu da vad tud gant an traoñ-se, hag achu gant Breizh war ar memes tro.



Pobl Vreizh

— An droug en deus an Ao. Merdy da gontestil serten traoñ, o tont, haer 'vo lared, deus an Enseller Akademiezh, ma soñj dehañ e chom kalz traoñ d'ober war dachenn ar skol, evid pezh a sell ar c'heleñ brezhoneg er skolioù da skwer. Gwir eo ne ra an Ao. Enseller Akademiezh nemed lakaad da dalvezad dre amañ al kesennoù hag an urzhioù a vez desidet uhelloc'h. Med diwar e gal, ha peogwir ema e karg evid gourc'hemennnoù just awalic'h, ar pezh a ra, ar pezh a laris, a pezh a les ober, an oll draouez a-wecholl ne venont ket peurvad, hag ez eus neuse an droug da gontestil : ar c'hentañ neuse deus an demokratiezh eo kaoud an droug da sevel a-eneb da serten traoñ a vez chosset, pa soñjer ne vez ket graet trawalc'h pe ne vez ket klasket goud hiroc'h diwarbenn interest ar vugale. Evid an Ao. Merdy evid emdamp, ne c'heller ket ober wardro interestoù skolioù Vreizh ma ne vez ket sellet goud evel bugale hag a zo eus ur bol, pobl Vreizh.

— Ober a raomp, an Ao. Merdy ha al, un dispartel etre : li an dud o c'harg gourc'hemennnoù ha lakaad da dalvezad urzhioù na venont ket heb tro diouzh interest gwir ar Vretoned vitan, hag 2) an oll re, mistri ha mestred-skol a ra war o zro gant kaloe, epad ur vuez-den a-bezh, ha red dehe plegad da dud ha da draoù na venont ket evid lakaad aneñ da chonñ.


Setu e c'houlennomp a vousez uhel an droug da gontestil kement savadur zo eus ar Stad C'hall : n'heker gante ober n'etra evid interestoù ur pobl, pobl Vreizh, dre ma nach ar Stad-se, dre, ez eus aneñ. Bez e c'hellit klouz ur santiment diheñvel a-grenn diouzh hon heni war ar poent-mañ : ho troed eo, med ur gasetenn a emsaverien eo Pobl Vreizh, ur gasetenn o vridañ mennoioù splañt, fraezh, ma n'eus ket da chom nebet evid goud p'ere lit. Bez e c'hell an Ao. Merdy eta tabañal ha gontestil, war an dachenn interest gant al besenn, en ur zoutañ an heñvennoù. Ha kement-se en deus graet. Ma lemp an Ao. Merdy da soñjal pezh a gar diwarbenn muse Tregarvan, war danvez an afer, da lared eo war an droug en deus da zisplegñ e soñj war b Pobl Vreizh, ez omp a-lio krenn gantañ, na boud ne vez ket hon oll lennerien al heni o soñj-se goude.

N'eo ket atakñ an dud eus e-personel eo en deus graet an Ao. Merdy, na dreistall c'hi bo-hunan nag heni ebet eus ho koleged. Displeget en deus e soñj diwarbenn ti-skol Tregarvan bet serrat ha deuet da vezañ ur muse. Marteze ez eo ur muse mad, Med ur muse eo memestra. Adreñv toud an traoñ-se, war ar maes ema an dud o vont kuit, ar re a chom o vont da gush, ar brezhoneg gwall fallig e stad, hag e welomp pegen disleget eo amzer-da-zont hon pobl. Bez zo louzder da bennañ ar c'heñved-se. Kennig a raomp aneñ.

Mard oc'h ken laer en ho lizher, ez eo salabourus ho peur graet kalz, mousad, evid an diskouezadeg-se. Ne raomp tamall ebet ouzoc'h-c'hi heni ha setu, d'hor memmo, arabad deoc'h bezañ c'hwere pe dipitet diwar lennenn an Ao. Merdy.

F. Morvanou, e karg eus Pobl Vreizh

UNVANIEZ POST AR BED HOLL
KARTEN - BOST
An tu ma e zo muret evit an adreaz



LIZHEROÙ

Stummoù 'zo us ar boelloneizh — an « dialectique » — ez eo gwali arvarus ober ganto.
 Sellit ouzh an Aotrou Jacques Cressard, prezegenner ha kannad brudet an RPR, Ewifañ, ar Gouarnunet ha paotred an FLB zo da vezañ silapet er memes toli, mignoned kuzh ma 'z int, an eil re hag ar re all, d'an URSS ; paet ganti marteze.
 Neuse, daoust ha n'eo ket bet gwelet mouezhoù ar Gouarnunet o'n em veskañ gant re ar C'haallisted ? Hag ar soñj a zeu deoc'h, emchañs, eus ar mouezhoarzh bet distaget meur a wech gant gouarnamant an URSS ouzhi renerien ar 5^e Republik, kement ma 'z eo bet feuket bras ar PCF, un doare gwarri o c'hoari gantañ, heñvel ouz ar warri a sav etre daou baotr kouezet e karantez gant an hevelep maoues. Iskis.
 Ewid an FLB, ma ne vije ket bet tud evel an Aotrou Cressard, da gredif eo e vije bet savet, abaoe peñ 'zo, e Bro-C'hall, Rannvroioù gant Bodadegoù dilennet gant an oll, ur C'husul-Sewentiñ en o fenn. Neuse, moarvad, aferioù ar Vretoned, an deskadurezh peurgedket, a vije bet renet, ewid un darn vras aneho, gant ar Vretoned o-hunan ha ne vije ket kén eus an FLB.
 Bremañ, heallit gant ewezh bras soutlided va foelloneizh-me :
 — An URSS a zo « skoazellet » gant an FLB, gouez da Jacques Cressard,
 — hogen an FLB zo anehoñ an abeg d'an RPR,
 — neuse an RPR-ed zo mignoned kuzh, « allies objectifs » an URSS !
 Sapre Jakes, va !
 Per ar Gall.

Kamaraded ker,
 Peurvuiañ e vez graet « mare ar burzhodoù » eus heni Nedeleg, med ar wech-mañ, pebezh burzhud gwelet ur Pobl Vreizh ken dispar !
 Pajennoù war baber luf, ur mell peñh foto bras war ar golo, skridoù sklaer hag aes da lenn, ya, ar mis-mañ, brawad Pobl Vreizh !
 Sur on e vo e mudi-se kalz muoc'h a lennerien ewid Pobl Vreizh. Bez ez eo bremañ hor Pobl Vreizh ur gasetenn kaer da weled, ha marc'had-mad ouzhipenn, fotolioù emni e-leizh, ha fonnus an danvez ive.
 Ne vezan ket a-du ataw gant kement hag e vez skrivet war b/Pobl Vreizh, med red eo din ansav e teu Pobl Vreizh da vezañ muoc'h-mui ur gasetenn o pijoud d'an oll vrezhonegerien.
 Va gwellañ gourc'hemmoù da skipailh Pobl Vreizh en e bezh, ha bloazh-mad da b/Pobl Vreizh !
 A greis kalon.
 M.T. Laot.

Kamaraded ker,
 Kas a ran deoc'h war-un-dro an arc'hant da adkomanantañ da Le Peuple Breton ha da b/Pobl Vreizh. Pijoud a ra din Pobl Vreizh muoc'h eged Le Peuple Breton dibaoe m'ho peus kempennet ar moullañ hag ar skeudennadenn anezh. Pezh a laka ahanoc'h da vezañ interestet gant Pobl Vreizh eo ar pennadoù-kaos. Voala. Setu e hetan deoc'h bremañ ur bloazh-mad, hag ar barados arag fin ho puhez, gis ma lavar Nono.
 Kristian Pronost, Kemper.

Pegen fichet kaer emma daet Pobl Vreizh da vout bremañ, ken braw hag he breur henañ ! Hag an danvez ken pijus ha ken aes da lenn. Eh oc'h ar an hent mad.
 Trugarez, Y. Marot.

Seta amañ ma adkomanant da b/Pobl Vreizh ewid 1978. Gourc'hemmoù.
 Herve Ar Beg, Kawan, 22140 Bear.

RADIO - U.D.B.
 Tel. (16.98) 80.18.47



Un ti-kenwerzh hebkén e GWENED e'fid an dilhad gis Breizh
 (kabigoù, mantill glaw hag all, jilettennoù martolod)
TI AR C'HABIG
 8, r. René-Rogues

TI AR C'HABIG
 8, r. René-Rogues

BAZHVALAN GIS NEWEZ KENNIGOU DA ZIMEZIÑ CRM BREIZH
 12, quai Duguay-Trouin 35000 ROAZON
 Peñg (59) 79 32 17
 — Impijad ti-kar, di-zimez, 22 vl., e-zweer ar mestr, kataliz o kont d'an ofiserezh, a garfe marteze gant plac'h y di-zim, plac'h a feiz, sinus, koant.
 — Lizehoù, d-z., 31 vl., gwall labourer, laouenn, dic'hedou, a garfe eured, gant Pl. Y. sinus, kempenn, di-singon ha d'ek un tres plus.
 — Labourer-douar, intañv, 44 vl., sefso, a ed dimezfe gant ur vaouez c'hoant deñs tichoud marteze er familh, hag ur vicher deñs ar vourzh toud.
 — Labourer-douar e pann un tiegezh, intañv, 53 vl., o c'hoant 15 000 L ar miz, a edimezfe gant ur vaouez kataliz, sinus, o c'hoant deñs tichoud.

Jules GROS
 Diplôme d'Etudes Supérieures Celtiques de l'Université de Rennes

LE TRÉSOR DU BRETON PARLÉ
 (Klennet da Strolladeg Tregontad)

DICTIONNAIRE BRETON-FRANÇAIS DES EXPRESSIONS FIGURÉES
 de GUYON

Edition - Diffusion
 LIBRAIRIE BRETONNE GIRAUDON
 30, rue de Kérampont, 22300 — Lannion
 1977

Eil mouladenn nevez deuet-er-maes

Komanantit da b Pobl Vreizh
 Ar gelaouenn bolitikel nemet a brezhoneg penn-da-benn
 B.P. 304 - 29273 BREST CEDEX
 Hanw hag hanw-badez
 Chamlec'h
 a gass e gomanant Boutin : 30 L (1)
 Skoaz : 50 L pe ouzhpenn (1)
 Estravro : 50 L (1)
 (1) Diverkit ar gerioù na servijont ket
 Amañ an arc'hant dre chekenn-bost (1) dre vandat-lizher (1) dre chekenn-vank (1) CCP RENNES 2746-79


STOURM RTB



Krouet bloaz zo, e stourm RTB ewid reiñ ar frankis war ar gamz d'ar Vretoned en o bro dre ar radio hag an tele : goulenñ a ra RTB 3^e 30 brezhoneg war an tele bemdez, ho diweztrac'h ur chadenn all-vrezhoneg. Med n'eo ket toud chañch vech : rebechet eo bet d'ar radio ha d'an tele e galleg o framagramy'peurliesañ dister, mad da lakaod spered an dud da gousked, ha n'eo ket da vezañ war ewezh ha kritik. Optim ar bobl, setu pezh eo ar radio hag an tele.
 Derc'hel a ray RTB da gass e stourm war raog. Goulenñ a ra grañs ur mererezh demokratel er radio hag an tele, da lared ei gant **kontroll** ar selaouerien ha telesellerien.
 Goulenñ a ra paotred ha merc'hed radio-tele-brezhoneg ur radio hag an tele ewid pemp departamant Breizh, da lared eo ewid Breizh en he fezh, hag ewid ma vo graet gant diw vech ar vro en ur fesson demokratel ha deread. Kreisennou RTB 'vo savet, lakaet 'vo petrisennou d'ober an dro ; goulenñ 'vez digant an dud anavez (maered, danvez deputeed) nac'h paeañ an toos radio-tele, pe ul lodenn oneañ. Hiziv an deiz eh eus wardro 400 a dud hag o deus distaole! 10 % eus an toos, hag 50 a dud hag a zo chomet heb paeañ tamn abed anezhañ.
 Fenn e vo an traoù, digompes an hent, rust ar ieu, stard an abadenñ, med emma re RTB a klask lakaod ar Stad c'holl da bleañ ha da sentiñ dauz ar feur-emploerioù etrevroadel bet sinet ganti kouskoude diwarbenn gwirioù ar bobloù. Ewid goid hirroc'h, skrivit da RTB-BP 15 - 22301 LANNION.

Y-B Montreux

Paperenn ewid goulenñ mont e-barzh UDB
 Hanw hag hanw-badez
 Chamlec'h
 Goulenñ a ran moned e-barzh Unvaniezh Demokratel Breizh
 D'an (d'ar) 19
 Sin :
 Da gass an-dro (troc'het pe adskrivet) da UDB B.P. 304 - 29273 BREST CEDEX



Tagnous ha tàer

re an tu dehoù...

Re an tu dehoù n'ousont ket ouzh pessort sant en em erbediñ kén... Nag a flac'hadoù o deus paket e-kreis o fass ar sizhunvezhioù tremenet-mañ !

Frankiset eo bet prisonidi ar **Polisario**... Ur wech dija e oa bet kasset da bourmen de Guiringaud, ministr gall an Aferioù Estren, gant paotred ar **Polisario**, pa' n doa goulennet digante frankisañ ar brisonidi. Bremañ, pa' z int bet graet a-benn ar fin, setu **Marchais** o troc'hañ ar peuriñ da **Giscard**, hag oc'h embann ar c'heloù en Alje. Gwir eo n'en deus lâret netra diwarbenn kement a zo bet graet gant re an **UDB** ewid diskoulmañ an afer... Petra 'ra Frañs an tu dehoù war an dachenn etrevroadel ? Netra, nemed c'hwi-tañ. Geo, un dra zo bet graet : kass unan deus perzh gouarnamant ar Frañs da gurunidigezh **Bokassa I^{añ}** ; ewid bezañ lu, n'eus ket par da **Giscard** ha d'e re ; pa soñjer pebezh istrogell eo ar **Bokassa**, hag un istrogell dañjerus ouzhpenn, o tispign milionoù ewid komedi e gurunidigezh, diwar goust paour-kaezh tud e vro, ha gant arc'hant kontribuable ar Frañs.

En diabarzh ne ya ket an traoù kalz gwelloc'h ewid re an tu dehoù. Na boud eo bet torret an emglew etre re an tu kleiz, ne weler ket e tenn re an tu dehoù kalz a brofit deus se : chom a raont int-i iwe disunanet, ha gwashoc'h c'hoazh ewid re an tu kleiz, rag re an tu dehoù n'o deus program ebed : peb heni anehe a ra bec'h ewitañ e-hunan... C'hwitadennoù ? Aet eo ar gelaouenn **J'informe** d'an traoù, ha diskaret braw ar **Fontanet** d'he heul... Med ewid **Barre**, e talc'h an



Le Peuple Breton

traoù da vont mad tre en-dro : **tout va très bien, Madame la Marquise**..

Gwashoc'h zo. Gwelet eo bet gant an oll penaos eo bet kont gant grev mis Kerzu an EDF. Droug ha droug bras zo savet ba mesk ar batroned. Ar re-mañ n'int ket kountant kennebeud, med arabad soñjal e teufont diwar se da vezañ deus an tu kleiz ! Ar c'hontrel zo gwir. **Giscard**, ewite, ne ziskouez ket kaoud « nerzh » awalc'h. Ema ar batroned diwar vremañ war an hent a gass d'ar fachism : ar pezh a faot dehe eo an urzh, lakaad ar vicherourien da blegañ, ha tremen heb **Giscard** ewid se mar bez red. Sur eo e vefont sikouret kaer gant **Chirac** war an dachenn-se. An aon rag an tu kleiz, an dipitadennoù savet diwar c'hwitadennoù an tu dehoù « kuñv » a-vremañ, trawalc'h eo kement-se ewid hadañ ar fachism. Arabad ankouaad ez eus c'hoazh fachisted bar Frañs, tud bet en OAS gwechall, ha nervied a beb sort.

Paotr ar **Front National**, **Le Pen**, en doa embannet, divezh, e oa bet lazhet o frisonidi gant re ar **Polisario**. Un Algerian zo bet lazhet e Paris. N'eo ket diouennet ar rassism c'hoazh.

Ni neuse, tud pobl Vreizh, chomomp war ewezh. War ewezh rag an tu dehoù, eveljust, ma kaver ennañ danvez fachisted. Ewid re an tu kleiz, ne assantont ket c'hoazh ez eus eus pobl Vreizh. Bez emamp ase ewid an dra-se just awalc'h. Emaomp o vont d'an emgann, emgann mis Meurzh 1978, dindan hon banniel-ni : gwenn-ha-du un tu anehañ, ha ruz an tu gin. Bez ez eus eus pobl Vreizh, hag emamp ni, ar raggward anehi, o heñchañ anehi trema ar sossialism. Oll emrenerien Vreizh eus an tu kleiz, labour zo ewidoc'h e-barzh an **UDB**.



LENNIT POBL VREIZH